

CHANSON

POTRET PLOUILLAU.

Var ton : *Adieu, Pontrêo.*

M'am bije speret da gompren, evel a meus
fantazi,

Me a vije n'em implijet da zonet da gomposi
Eur c'himiat leon eus a c'hlac'har, grêt da gons-
crivet yaouanq

Odeustennet ar billet du ebarser blavesprezant.

Ebarser bla mileiz cant c'hoec'h, ar bempavis
güengolo,

E zeo digueet adare eus a baros Plouillau

Tud yaouanq evit an arme, tud eus ar re der-
rupla;

Glac'haret ê o oll ligne, p'o güelont o partia.

Dapartia gantan actif ne zeus qen nemet pêvar;

Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar
Meledar,

Ha Yannic Prat eus ar Goajou, ha Pipian Aveant:

Pêvar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud
vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en deiz-se de gamarad:

Emâ a zo eun devez trist hac a ra din calonad!

Güelet va mam baour o vouela , ha va zad qêz
desolet !

Va c'halonic ebar em c'hreiz zo dija qazi rannet.

Calz a zônjfe dè , marteze penos e ven eur
poeltron ,

Em be aon rac eun ten fusil pe rac eur vouled
canon ,

P'otramant aon rac ar fatig , o vale dre an
hentchou ,

Pe gousqet var eur goele can ebars er c'horde-
gardou.

Douguen va dillat var va chouq , va fusil ha
va zabren ,

Bale bemde a guêr da guêr dre ar fanc hac ar
vouillen ;

Ha goude e fin va beach , rancout marteze campi ,
Pe gousqet var an douar yen pe autramant bi-
voaqi.

Tor o deus an nep a sônj se ; ma c'halfent
lenn em c'halon

Evit güelet va bolonte ha va inclination

Ma na fotfe nemet va goad , me en scuille tout
joaüs

Evit souten hon Impalaër , eun tad qer caran-
tezus !

Piou na gombatfe qet hardi gant eun Impalêr
christen ?

Eur gaus qer just hac e hini a zo facil da zouten ,

Pa zomp memprou da Jesus-Christ, soudarded
 an Aviel,
 Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-
 Santel.

Arça eta, camaradet, qent quïttat eus hor
 c'hontre,
 Demp-ni da ilis Plouillau da zupplia-hon Doue
 D'hor prezervi demeus goal chanç pa vezimp en
 armeou,
 Ha da gonsoli bars er guêr hon tadou hac hor
 mamou.

Adieu dêc'h, Autrou Sant Millau, patron eus
 ar Barros-mâ;
 Adieu, qerent ha mignonet, cessit brêmâ da
 vouela;
 Pedit Doue hac ar Verc'hez da gavet soign a-
 c'hanomp.
 Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout elec'h
 ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperanç, eme an tad
 dezolet;
 Piou a gonsolo da dud paourgoude ma vi partiet?
 Pa vin accablet gant cosni, me vô clêvet o laret:
 Ma vije va mab qèz er guêr, en dije va zoulajet.

Clêvit ar vam o qimiadi ive digant e buguel:
 Deus amâ c'hoas ma c'hambrassin ur vech qent
 eguet mervel;
 Aben ma retorni d'arguêr mevo êt eus ar bed-mâ:

Deus amàn etre va divrec'h evit ar vech diveza.

A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet
d'ar billet ,

Bennos vel ma fot din cousquet, me a zeblant
da velet

O tont eus eur gombat sanglant, var eur chariot
blesset ,

Pe tolet en eun hospital, gant an ollabandonet.

Ar zoudard yaouanq contristet, c'hoas qent
eguet partia ,

Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur vouela :

Tavit, va zad ha va mam baour, ha bevit en
esperanç :

Doue, tad a vizericord, a zo bras e brovidanç.

Goude mavo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gant graç Doue hac ar Verc'hez, e vezo fin d'ho

clac'har ;

Evit merq, eus hor vaillantis, gant laure deus hon
tocou ,

Ni a zistroyo prest d'ar guêr evit sec'hi ho taelou.


Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet,

Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha qerent, ha
mignonet :

Ha ma na mimp qet ar boneur er bed-mâ d'en
em velet ,

Graç deomp ebais er barados assambles d'en em
gavet.

F I N.



G U E R Z

VAR SUJET DISTRO EUN DEN YAOUANQ

PARTIET GANT AR GUENTA REQUISITION.

Var ion : *Va Flaneden zo caled.*

TOSTAIT oll, tud yaouanq, ha qemerit true
 Ouz ar blaneden bonner a boez var va bue;
 Deut da guemesq ho taelou assambles gant va re,
 Da zoulaji va foanniou, deut da voela varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zòn bet contraignet
 D'abandoni va c'herent, va douç, va mignonet,
 Evit monet d'ar brezel da zouguen an armo
 E faveur al liberte voa prometet d'am bro.

Abaoue qeit all amzer, n'alfen qet lavaret
 Pet combat ha pet poanniou a meus-me anduret.
 Tri c'hant leo am separe eus va c'herent nessa,
 Ha na meus bet diouto qêlou an distêra.

E creiz ar c'harnach bemde va buê exposet,
 Unan demeus va diou vrec'h erfin a meus collet,
 Hac evit oll recompanç e meus bet va c'hônje,
 Hep receo nep pansion da veva em c'hontre.

C'hoas laouen o tilezel servich ar Republik,
 N'en deo qet deut va speret da gompren er fatiq
 Eus an hent hir ha poannius am boa-me da ober
 Aroc gûelet va zud qêr hac êruout er guêr.

Collet e meus ar gallout da rêi sicour d'am zad,
 Hac o tivoeret va brec'h, n'allin mui labourat.
 Brêmâ va zud am mago, pa meus-me c'hoas ar chang
 M'o deus levê hac arc'hant ebars en abundanç.

Cetu me dija éru tostic demeus ar guêr,
 Gant ar joa ouz va gêlet an oll a ray din cher.
 Va zad, va mam, va c'herent, breudeur a c'hoarezet,
 Ha va mestrezic fidel, a vo oll ravisset.

Bonjour déc'h, ô va c'hontrel eürus en em gavân
 Gallout e'hoas o contemphi, dont da vervel amân.
 Va c'halon gant ar joa vras em c'hreiz zo seziet
 O tostic demeus an ty el lec'h m'ôn bet ganet.

Mes, oc'h antreal enni, e zôn bet trubuillet,
 Eun den dianav din-me en deus din lavaret :
 Eruet fall oc'h amân; sortiit, va mignon;
 Ne mâ qet ar mestr er guêr n'ho po qet aluzon.

Souezet bras o velet n'anaveyen hini
 Touez qenlies personach a voa o rên en ty,
 E meus-me prest respontet : ententit va réson,
 Me n'en don qet deut amâ da glasq an aluzon.

Clasq a rân va c'herent qer er plaç m'ôn bet ganet ;
 Al lec'h-mâ a zo dezo, amâ òn bet maguet.
 Lavarit din, me ho ped peléc'h en o c'havin :
 Ne zefot netra qen din evit va c'hontantin :

An den-mâ a zo follet, int commancet crial :
 N'en dê qet mab d'hor mestr-ni ; ret eo er chasseal.
 Gêlet ho pije neuze eur vanden mevellyen
 O tiredec gant bizier d'am chasseal souden.

O sortial gant glac'har ha beuzet em daélou,
 Da glasq va zud eléc'h all, pe glêvet o c'hélou,
 En hent e zôn bet scòet vel gant eun tol curun,
 Pa meus-me anavezet voa collet hor fortun.

Souden e meus rancontret va c'hoar ar yaouanqa,
 Eur zac'hic staguet outi, o c'houlén e bara.
 O clasq compren ar maleur varnomp-ni digûezet,
 Va speret zo bet troublet, ha va c'halon mantret.

O Doue ! oll buissant, roit din hoc'h asistanc,
 Roit din an nerz da glêvet penos ho providanc

E devez bet permetet, evit va c'hastia,
Ma zomp-ni bet reduiset er stat an horrupla!

Va c'hoaric paour, me ho ped, soulajit va mizer;
Hast bras a mous da glêvet qêlou deus va zad qer,
Hac eus ar vanic tener e devez hor savet :
Mervel a rân en defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas dit, va breuric paour ! ne oufes qet compren
Peguen bras eo hor maleur, peguer bras hon angen....
Allas ! ouspen hor madou a renqomp divoeret :
Hor c'herent carantezus zo bet deomp ravisset.

En despet d'al lezennou grêt gant ar Republiq,
Hon tad voa chommet fidel d'an Ilis Catholig ;
Rac-se gant an tirantet e zeo bet condaonet
Da bignat var ar chaffot vit beza dibennet.

Prestic goude, hor madou a zo bet confisqet,
Hac ive, prestic goude, siouas ! int bet gûerzet.
Consumet gant ar chagrin eus qement a gollo,
Hor mam a zo bet neuze scôtet gant ar maro.

Cessit, va c'hoar, da barlant ; cessit d'am dezoli,
Re a meus var an douar a dourmant hac anui,
Er moment mac'h esperen commanç beva eurus,
En em gavân, va Doue ! muyoc'h-muy maleûrus.

Goude beza servichet ar Republiq ingrat,
E deus, d'am recompanç, guillotinet va zad,
Laqet va mam da vervel dre nerz an dizesper,
Ha gûerzet va oll vadou ; n'em bo uemet mizer.

Diouz an tourmantchou garo a stourm ous va speret,
Pelec'h caout soulajamant, pelec'h cavet remed ?
Ar plac'h e deus captivet a bell va zantimant
A zoulajo va hirvoud gant e c'homzou charmant.

Varzu ty va mestrezic e zân gant esperanç
Caout en e fidelite remed eus va zouffranç :
Bonjour dec'h, va rouanez ; cetu me deut er vro :
Ancouët eo va oll boanniou, mar am c'harit atao.

Me zo FANCHE, ho mignon, distro eus ar brezel,
 Hac a so en peb amzer chomet d'c'h-u fidel.
 Demeus va oll garantez ebars en hoc'h andret
 E meus bremâ esperanç beza recompancet.

Petra, paour qêz rezeudic! clasqit-u em c'hever?
 Biscoas ne meus ho quelet, na deziret ober;
 Biscoas ne meus ho caret, na birviquen n'er grân,
 Ha cetu, en bêr gomzou, ho setanç diveza.

Me zo an den maleurus, ne gafet qet e bar.
 Mil guech milliguet an heur m'ou deut var an douar!
 Oll gouliou va c'halon zo nêve digoret,
 O veza bet rebutet gant va muya caret.

Va mestrez ouz va gûelet couezet en paourente,
 Nijet e fromessaou, nijet e c'harante.
 Esperanç va eurusted, allas! zo tremenet
 Evel ma ra eun ure en nôs dre hor speret.

An exempl-mâ, tud yaouanq, a deu d'oc'h instrui
 Peguen dister ar bed-mâ, leun a ingrati;
 Epad ma zoc'h pinvidiq gant an oll oc'h caret;
 Mes mar tro rod ar fortun... adieu ar mignonet!

Petra rân var an douar? collet va mam, va zad,
 Va mestrez ha va madou, va brec'h da labourat:
 O vervel pe o veva er c'hoad gant al loened,
 Rin gûell eguet implori amâ faus miguonet.

Er c'hoajou an tevalla o tout d'en em guzat,
 Maguet vin gant va glac'har, hac eus va daoulagat
 E turedo an daelou da drec'hi va zec'hed,
 Betec ar moment eûrus ma quittain ar bed.

En desnet d'an injustiq a eprouvân hirio,
 Me bedo a greiz cafon evit boneur va brô:
 O va Doue! deurvezit renta, dre ho puissanç,
 Ar boneur, al liberte d'am brô guêr eus a Franç.